

Les Chemins du Kreiz Breizh

Photo d'Alex,
entre Plélauff et Plouguernével.



Le Contrat Départemental Lecture Itinérance 2023 - 2026, signé entre le Département des Côtes d'Armor et la DRAC Bretagne, se déploie en 2023 et 2024 sur le territoire intercommunal de la Communauté de Communes du Kreiz Breizh. L'ambition principale de ce projet est d'accompagner les bibliothèques locales à se positionner comme lieux inclusifs pour toutes les Costarmoricaines et tous les Costarmoricains.

Pendant un an, de septembre 2023 à juin 2024, plusieurs événements sont organisés dans le territoire intercommunal, dans le cadre du dispositif Contrat Départemental Lecture Itinérance.

Parmi les activités prévues, dix bibliothèques des communes de Bon-Repos-sur-Blavet (Laniscat), Lanrivain, Maël-Carhaix, Mellionnec, Plélauff, Plouguernével, Rostrenen, Saint-Nicolas-du-Pelem, Trebrivan et Trémargat, ont invité les habitants du territoire à prendre part à la conception d'une exposition photographique itinérante qui vient valoriser les « Chemins » du territoire.

Johanne Gicquel, autrice et artiste, a animé des ateliers de photo nature et des ateliers d'écriture auprès de différents

publics : 110 photos ont été transmises sur la thématique des Chemins du Kreiz Breizh, 18 élèves de l'école de Lanrivain et 12 participants issus des publics des bibliothèques du territoire ont participé. 15 photos ont été retenues par le comité de sélection et des textes ont été créés à partir des photos sélectionnées à l'école de Lanrivain et lors d'un atelier grand public proposé à la médiathèque de Rostrenen.

Du développement d'une fibre littéraire à la simple expression écrite de l'émotion suscitée par la photo, cette exposition vous permet de redécouvrir la beauté du territoire à travers le regard de ses habitants.

Hentoù Kreiz Breizh

Photo de Mariannick,
Pont gallo-romain de Plouguernével.

Gant Departamant Aodoù-an-Arvor ha RRAS Breizh e oa bet sinet ar C'hevrat-departamant Lenn Bale 2023 - 2026, ha lakaet eo e pleustr e 2023 ha 2024 e kumuniez-kumunioù Kreiz-Breizh. Graet eo da gentañ-penn evit sikour al levraouegoù lec'hel da vezañ lec'hioù degemer evit an holl dud en Aodoù-an-Arvor.



E-pad ur bloavezh e vez aozet abadennoù a bep seurt, eus miz Gwengolo 2023 da viz Even 2024, er gumuniez-kumunioù, e-stern ar C'hevrat-departamant Lenn Bale.

Unan eus an oberoù-se a sell ouzh al levraouegoù e Berrepor-ar-Blavezh (Lanniskad), Larruen, Mêl-Karaez, Melioneg, Pellann, Plougernevel, Rostrenn, Sant-Nikolaz-ar-Pelem, Trabrivann ha Tremargad, o deus pedet tud ar vro da sikour krouiñ un diskouezadeg vale gant poltredoù diwar-benn « Hentoù » ar vro.

Johanne Gicquel zo skrivagnerez hag arzourez. Lusket he doa atalieroù war an doareoù da boltrejañ an natur ha war ar skrivañ gant a bep seurt tud : 110 poltred zo bet kaset diwar-

benn Hentoù Kreiz-Breizh, ha kemeret e oa bet perzh gant 18 skoliad eus skol Larruen ha 12 den hag a gustum daremprediñ al levraouegoù e kumunioù ar gumuniez. 15 poltred zo bet dibabet gant ur bodad, ha skrivet zo testennoù gant bugale skol Larruen hag e-kerzh un atalier digor d'an holl aozet e mediaoueg Rostrenn.

Gant an diskouezadeg-mañ, pe e vefe savet diwar ur gwir santidigezh lennegel o tont war wel, pe diwar lakaat dre skrid ar fromoù deuet diwar ar poltredoù, e klasker ober deoc'h gwelet adarre pegen kaer eo hon bro dre selloù an dud a zo o vevañ enni.

L'ensemble du programme détaillé est à retrouver sur bca.cotesdarmor.fr



Côtes d'Armor
le Département

PRÉFET
DE LA RÉGION
BRETAGNE
Liberté
Égalité
Fraternité

CCKB
Communauté des communes du
Kreiz-Breizh
Kumuniez-kumunioù